



# Sachañ evezh ar Vretoned war an digreizennañ

**Emañ gouarnamant Frañs o prientiñ ur bazenn nevez en digreizennañ. Marylise Lebranchu, ministrez karget eus adreizhadur ar Stad, a ginnigo kemmoù nevez a-benn nebeut. Evit diskouez e c'houlenn Breizhiz zo traoù resis evit o bro (adunaniñ, galloudoù e-keñver arc'hant, endro, yezhoù) e vo ur vanifestadeg e Montroulez d'ar Sadorn 15 a viz Kerzu. Gant Diwan Breizh e oa bet disklêriet nevez zo e oa a bouez mont di. E penn aozadur an degouezh emañ kevredigezh Breizh Unvan hag ar bodad 44=Breizh. Sed amañ soñjoù ar skipailh stourmerien eus Bro-Naoned, kaset gant daou ezel.**

**Gervel a rit ar Vretoned da vont da Montroulez, bro Marylise Lebranchu, d'ar 15 a viz Kerzu. Perak bremañ ?**

Peogwir e vo votet ul lezenn war an digreizennadur a-barzh pell, an "Akta III", e Bodadenn vroadel Frañs. An akta-se a vo ul lezenn hag a rofe war a seblant muioc'h a wirioù d'an tiriadoù ha d'ar strollegezhioù lec'hel. C'hoant hon eus e vefe Marylise Lebranchu hag an dilennidi all atebek war o disklêriadenoù a-du evit adunaniezh Breizh.

**Petra zo e danvez "Akta III" an digreizennañ hag en deus maget ho tiviz manifestiñ ?**

Diaes eo just a-walc'h gouzout da vat petra a vo en destenn-se. Lakaet ez eus bet da grediñ d'an dud e vefe dispar an Akta III, met hep reiñ kalz a ditour. Gouzout a reomp ar pezh a fell deomp avat. C'hoant hon eus e vefe an trede Akta un degouezh da adunaniñ rannvro Breizh ha departamant al Liger-Atlantel en ur strollegezh voutin, ha kaout muioc'h a c'halloudoù war a bep seurt tachenoù : politikerezh sokial, ekologiezh, deskadurezh, yezhoù... Koulskoude, pa vez gwelet ar pezh a oa lâret diwar-benn un departamant euskarat un nebeud mizioù zo, hag

ar pezh a vez lâret bremañ ez eus peadra da vezañ nec'het gant an trede Akta-se !

**Diaes e vez sachañ evezh ar gelaouennerien hag an dud dre-vras gant manifestadegoù diwar-benn adunaniñ Breizh pe statud ar yezhoù da skouer. Daoust hag-eñ e vag skipailh 44=Breizh ur preder diwar-benn-se ?**

Ya, diaes eo sachañ evezh ar mediaoù ! An darn vrasañ anezho ne vez ket prest da bleidiñ gant kudenn an adunanidigezh evit broudañ seurt darvoudoù. Pa n'emaint ket a-enep zoken ! Magañ a reomp ur preder war-se evel-just, ha diaesoc'h c'hoazh eo komz eus an adunanidigezh el Liger-Atlantel. Gant mediaoù evel *Ouest-France*, *Presse-Océan*, *France 3 Pays de Loire* ha kement zo, e vez santet ul levezon vras gant rannvro "Broioù al Liger". Ret eo neuze kavout doareoù da lakaat ar gaoz war ar pezh a ra 44=Breizh, oc'h ober darvoudoù a cheñch un tamm. Setu perak e klaskomp ober ar vanifestadeg e Montroulez en taol-mañ ! Spi hon eus e vo komzet muioc'h eus an darvoud-se hag e vo roet tro da zivizout en un doare sirius hag efedus. Ouzhpenn-se, aozañ ar vanifestadeg e Montroulez a c'hell lakaat muioc'h a dud eus Leon, Treger ha Kerne

da gemer perzh ! A bouez eo diskouez emañ an holl Vretoned a-du gant an adunanidigezh hag ez int prest da vanifestiñ koulz e Naoned hag e Montroulez.

**Un heuliad a vo d'an devezh-se ?**

Diaes eo gouzout evel boaz. Ar vanifestadeg-se a dalvez da lakaat ar gaoz war an trede Akta. Gortozomp gwelet petra a vo el lezenn-se, met bezomp prest d'ober kinnigoù diwar-benn ar pezh a fell deomp. Dalc'homp da stourm !

**Petra a rafe e vefe laouen skipailh 44=Breizh d'ar 15 a viz Kerzu ?**

Laouen e vefemp ma vefe miliadoù a dud o tont er vanifestadeg evel-just. Tabut ar sifroù n'eo ket tout koulskoude. C'hoant hon eus e vefe komzet eus an adunanidigezh er c'heleier evit ma servijfe da aozañ ur c'hendiviz gwir. Poent eo lakaat ar gaoz etre an dilennidi hag annezidi Breizh evit gouzout petra hon eus c'hoant d'ober evit Breizh an amzer da zont.

**Dastumet gant M.L.**

Emgav ar vanifestadeg war blasenn an Ti-kêr e Montroulez, da 2e30 g.k.

Evit gouzout hiroc'h :  
<http://44BREIZH.COM>  
[WWW.BRETAGNE-REUNIE.ORG](http://WWW.BRETAGNE-REUNIE.ORG)